

Fol. 107

# CHANSON

## POTRET PLOUILLAU.

Var ton *de la Pantrea*

AM bige spere <sup>el ma</sup> goumpren, ever ameus lanvazi,  
 A vije n'eur-impriet da z'zaet da gompri  
 e'hinviad leun eus a e'blac'har, grêt da gonscrivet  
 yaouanq,  
 eus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.  
 Ebars er bla mil eis cant e'hoec'h, ar bemp a vie  
 guengolo,  
 z'eo digueet adare eus a baros Plouillau  
 d yaouanq evit an arme, tud eus ar re derropla,  
 e'charet e o oll ligne, p'o gueloñt o partia.  
 Da bartia gant ag actif, ne beus gen nemet p'ever:  
 voanic Jacob eus ar bourg, ha Guiljan ar Meledar,  
 a Yannic Prat eus ar Goajou, ha Pipi an Aveaul,

102  
2  
Pèvar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :

Emàn a zo un devez trist hac a ra din calonad !

Guelet va mam baour o ouela ha va zad qèz desólet !

Va c'halonic ebars em c'hreis zo dija qazi rannet.

Calz a sonje d'e, marteze, penos e ven eur poltron,

Em be aon rac un ten fuzil pe rac eur vouled canon,

P'otramant aon rac ar fatiq, ó vale dre an henchou,

Pe gousqet var eur guelè can ebars er c'hordegarchou.

Dougua vadillad var va chouq va fuzuil ha va zabren,

Bale beinde a gær a gær dre ar fanq hac ar vouillen;

Ha goude, e fin va beach, ranqout marteze campì,

P'e gousqet var an douar en, pe otramant bivoaqi.

Evit guelet va bolonte ha va inclination;

Ma na fosse nemet va goad, me en scuilse tout joaüs

Evit souten hon impalaër, un tad gen carantezus!

Piou na gombatse qet hardi gant un impalaër christen!

Eur gos gen just hac e hini a zo facil da zouten;

Pa zomp memprou da Jesus-Cbrist, soudardet an aviel

Bogale da Zoue an tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, qent quitat eus hor c'hontre,

Deomp-ni da ilis Plouillau da suplia hon Doue

D'hor prezervi demeus goel chanç pa vezimp en armeou

Ha da gonsoli bars er gær hon tadou hac hor mamou.

Adieu dèc'h, Autrou Sant Millau, patron eus ar

baros-mâ;

Adieu, qerent ha mignonet, cessit bréma da ouela :  
 Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign'achanomp,  
 Hac hon Æl-mad d'or e'hunduo partout elec'h ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperanc, eme an tad dezolet ;  
 Pion a gonsolo da dud paour goude ma vi partiet ?  
 Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret :  
 Ma vije va mab qez er gær, en dije va soulajet.

Clêvit ar vam o qinviadi ive digant e buguel :  
 Deus amàn e'hoas ma e'hambrassin ur vech qent evit  
 mervel ;

Aben ma retorni d'ar gær, me vo ét eus ar bed-mâ :  
 Deus amàn etre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma e'heus tennet d'arbillet,  
 Bemnos vel ma fot din couget, me a seblant da volet  
 O tont eus eur gombat sangiant, var ur chariot e'lesset,  
 Pe tolet en un hospital gant an oll abandonet.

Ar soudard yaouanq contristet e'hoas qent evit partia,  
 Evit essât o e'honsoli a lavar, en eur ouela :  
 Tavit, va zad ha vamam haour, ha bevit en esperanc :  
 Doue, tad a vizericord, a zo bras, e brovidanc.


Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
 Gant graç Doue hac ar Verc'hes, e vezo fin d'ho clac'har,  
 Evit merq eus hor vaillantis, gant lore eus hon toqou,  
 Ni a retorno prest d'ar gær evit sec'ha ho taelou.

Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet ;  
 Adieu d'hon oll anaoudeguez ha qerent ha mignonet :

Ha ma na mimp qet ar bonheur' er bed-mà d'en em  
velet,

Graç deomp ebars er barados assambles d'en em gavet.

FIN.



10

## AR C'HONSCRI YAOUANQ.

Var ton : *C'était un conscrit d'Corbeil.*

**D**eur da selaou ya c'hlemou,  
Ha va t'hanadennou ;  
Rac n'en deo qet hep rêson,  
Nan, hep rêson ; nan, hep rêson ;  
Rac n'eo qet hep rêson  
Eo glac'haret va c'halon.

Me a voa em plijadur  
Er bourg demeure a Blufur,  
Pa glêvis an tabourin,  
An tabourin, an tabourin  
Pa glêvis an tabourin,  
A ras din calz a chagrin.

Eno voe guelet neuze  
Oll gonscriet ar c'hontre,



O tont da denna'r billet,  
Tenna'r billet, tenna'r billet;  
O tont da denna'r billet  
Evit beza soudardet.

Pa laqis en toc va dorn;  
Me ne voan na dall, na born,  
Rac guelet a ris diouc'h-tu,  
Diouc'h-tu, diouc'h-tu, diouc'h-tu, diouc'h-tu  
Rac guelet a ris diouc'h-tu  
Em boa bet ar billet du.

Me yas da laret d'am mam :  
An dro-mâ eo va beg cam,  
Rac tennet meus numero tri,  
Numero tri, numero tri;  
Rac tennet meus numero tri.  
~~Hac e meus un triplad III.~~

Mar teu va doue d'am goulen,  
Lavarit dezi souden :  
Yannic qez, d'amourous coant  
D'amourous coant, d'amourous coant;  
Yannic qez, d'amourous coant  
A ranq mont d'ar regiment.

Ho possubl ve da Yannic  
Dont da guitât e zouciq!  
Biqen n'ellin sur, anes-ân,  
Sur anes-ân, sur anes-ân;  
Biqen n'ellin sur, anes-ân,  
Cout nep plijadur bremau.

Mes, na c'hlaouren, qet, Mari :  
 Torch da veg ha c'hoes da fri,  
 Mir dezàn mad da galon,  
 Mad da galon, mad da galon ;  
 Mir dezàn mad da galon,  
 Pa deuy deus e c'harnizon.

Qen a vo, va doucig coant,  
 Mont a ràn d'am regimant,  
 Eno me rei sur va dever ;  
 Sur va dever, sur va dever ;  
 Eno me rei sur va dever,  
 Da c'hortos distrei d'ar guêr.

N'am ancounac'ha bigen,  
 Rac mervel a raen souden :  
 Ro din ur poqic stard va douc  
 Va douc, va douc, va douc, va douc ;  
 Ro din ur poqic stard, va douc,  
 Da gonsoli da amourous.

Adieu ta, tud va farres,  
 Ha te, va mignonnes qèz ;  
 Adieu, va zad, ha va mam,  
 Va zad, va mam, va zad, va mam,  
 Adieu, va zad ha va mam,  
 Laqit fin d'hoc'h oll estlam.

Mont a ràn diouc'h-tu en rout ;  
 Rac ret mad eo dèc'h gouzout  
 Penaus hor vaillant general,  
 Hor general, hor general ;

7  
707  
Penaus hor vaillant general  
En deus ezom ouziny ractal.

Goude difen va mam-brô,  
En ho touez me zistroyo ;  
Ha neuze , me en assur ,  
Me en assur , me en assur ;  
Ha neuze , me en assur ,  
E vimp oll en plijadur.

Pa vin en ur garnizon ,  
Bez tranqil var da vignon ,  
Rac did e vin bepret fidel ,  
Bepret fidel , bepret fidel ;  
Rac did e vin bepret fidel ,  
Va douciq coant ha va êl.

Ha mar clasq bigen plac'h coant  
Va c'hanjoli ; en instant ,  
Parleflanc deo , parleflanc clei  
Parleflanc clei , parleflanc clei ;  
Parleflanc deo , parleflanc clei  
A rin-me bepret sur dei.

Rentet ebars em parres ,  
O pourmen gaut va mestrez ,  
Ouzomp an oll a sello  
Oll a sello , oll a sello ,  
Ouzomp an oll a sello  
Ha tant joa a lavaro :

Ara , na brava daou den !  
a ve oll calz laouen

: 70 B.

Ous o guelet o temezi,  
O temezi, o temezi;  
Ous o guelet o temezi,  
Hac o chom en hon touez-ni.

M'ho trug're, mignonet :  
Demeurs e vo hon euret ;  
Rac-se deut oll d'an ebat,  
Oll d'an ebat, oll d'an ebat,  
Rac se deut oll d'an ebat  
Ni ho ped a galou vad.

Adieu, mont a rân en hent,  
Rac, m'en assur e zeo poent :  
Graç deomp un deiz d'en em velet  
D'en em velet, d'en em velet ;  
Graç deomp un deiz d'en em velet ;  
Qen a vo, va mignonet.

*par: A. Ledan*  
**P I N.**